

- 13 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

90. KENTA FUMELLEN IAOUANK ...

( follenn 4)

Kenta fumelen iaouank a rankontris biskoas  
E vellis en eur pardon ag am rejouissas.

A me asten va fuchou da vond petek enni  
da konta deñ va doare, da c'houzout e hini.

Kenta ma klevis parlant e voa lavaret din :  
Demezot eo ta vestrez, ne po ket anezi.

A me e komer neuze eun tamik poan speret  
Met gant ar c'hras a Zoue ne kontunuas ket.

A me o fichout neuze var komzou va mestrez  
Ne zarempredis nikun evid mond d'ober al lez.

Na kenta ma haruis na gant ma douç Mari :  
- Ouman ar fidelite o poa prometet din ?

- Gant va zad a va mam, me zo bed kiriek,  
gant va zad a va mam me a zo bed forset;

Da komeret eun intaon ma ne plich kamet din,  
Divaloa pen kristen a zo ac'halen d'he di.

- A sa ta, va mestrezik, ken evid dispartia,  
Lakit o torn em ini evid ar vech divea.

Na me a reket dec'hui ahan da fin ho bue  
Goal chans a paourente a kalz a bugale.

Pedid Doue ahanon ma na ellet a ken  
Kauz e vezoc'h d'am malheur mar gari droug ganen.

~~~~~

Jannet Puill, 9 Fevr. 1851

~~~~~